

*Tud ar vro - Bro Leon*  
Roll kanaouennoù - Dañs round

**Chansusañ marc'hadourez**

Chansusañ marc'hadourezh a zo war an douar, a zo war an douar,  
Eo karout ur fumelenn va c'halonig a oar,  
O verduretig dondène, O verdure dondé.

Me am eus karet unan, n'eus ket a bell amzer,  
Dimezet eo er bloaz-mañ da un apotiker.

Un apotiker yaouank eus a gweled Leon,  
Hennezh ra din-me gouelañ eus a-greiz va c'halon.

Laeret en deus va mestrez, hag he lakaet e kamb,br,  
Hag alc'hwezet varnezi gant un alc'hwez arc'hant.

Met dont a ray un amzer, me 'dapo an alc'hwez,  
Am bezo Marivonnig en despet d'he lignez.

Ma em bevez-me Marivonnig, em eus he faeet mat,  
Pemp kant skoed en aour melen em eus roet d'he zad.

Pemp kant skoed en aour melen em eus roet d'he zad,  
Ha dezhi pevar ugent evit kaout he gras vad.

Marivonnig eus a Gleder a zo ur flardrinenn,  
Rubanoù war he botoù, dantelez war he fenn.

Disul vintin pa savis, e-tal ar feunteun glas,  
Me a wel Marivonnig o walc'hiñ he bisaj.

Na pa vez Marivonnig o vont d'an oferenn-bred,  
N'eo ket ret dezhi teir eur evit prepar moned.

Dre ma walc'he he bisaj ken sklear eget dour,  
E welen va skeudenn enni 'vel en ur melezour.

[sklaer]

Na pa vez Marivonnig o pignat ouzh ar c'hrec'h,  
E teu paotred Plougerne da gregiñ en he brec'h.